

# An Oriant Odissea, ur c'harter nevez tro- ha-tro d'ar gar

**Ur c'harter ma vo ur stroll savadurioù treuzet-didreuzet gant hentoù glas ha tachadoù boutin.**



ARTEFACTORYLAB

Gant karter nevez gar an Oriant ec'h eus digarez da welet aozadur kêr en ur feson arall ha da ginnig sevel enezennigoù kemmesk. Àr ouzhpenn 15 hektar e c'hellehed kempenn 100 000 m<sup>2</sup> a savadurioù nevez : 32 000 m<sup>2</sup> evit burevioù, 28 000 m<sup>2</sup> evit stalioù-kenwerzh, 42 000 m<sup>2</sup> evit lojerisoù, hag 20% anezhe evit lojerisoù sokial. Krouet e vo 2 500 post-labour ha lojet e vo 1 200 annezad ouzhpenn. Ar gar nevez hag e leurgêr vras durc'het doc'h kreiz-kêr eo antre ar c'harter. Ul lec'h buhezek nevez ha neuz modern an Oriant a vo kinniget d'ar veajourion.

Karter nevez ar gar zo bevennet gant un tachad terkiñ kendivizet (TATEK), etre ar vali de Chazelles er Reter, ar boulouard Kozhvao-Maner er Su, ar straed Mañsell er Gornôg hag ar straed Braille en Norzh. 10 enezennig a vo er Su d'an hentoù-houarn, 7 kenti bras a-dreist dezhe é aroueziñ tourioù-tan, ha peder enezennig-savenn arall a vo en Norzh. Etre ar savadurioù e vo hentoù a ziwall an natur a-ratozh-kaer evit an dud àr droed hag ar beloioù, tachadoù glas rannet e liorzhoù, savennoù ha hentoù-kerzh gwezek. Ur gwir frankiz buhez e vo ar c'harter nevez-se, ma vo savet 500 lojeris, hag 20% anezhe evit lojerisoù sokial, a-benn un dek vlez bennak, evit roiñ bod da 1 200 a dud ouzhpenn.

Ur gorread 28 000 m<sup>2</sup> zo raktreset evit ar stalioù ha 32 000 m<sup>2</sup> zo miret evit ar burevioù. Parklec'hioù, en diaz ag an enezennigoù, a rakweler ivez evit kouchiñ doc'h kresk an obererezh a vo gant ar c'harter nevez hag ar gar Tren Tizh Bras nevez. Paraviz d'al leurgêr, en diaz ag an Triskell hag ar gar e vo ur pikol leti-preti 2500 m<sup>2</sup> gant 4 live da zegemer ar veajourion hag ar begoù-fin. Dre ma vo lojerisoù, obererezhioù micher ha stalioù-kenwerzh nes er mem lec'h, nepell a-zoc'h kreizig-kreiz an Oriant, e vo, a-dra-sur, ur vuhez karter ha birvilh bemdez en tachad nevez-se. ■

Vous trouverez la traduction de cet article sur le site [www.lorient-agglo.fr](http://www.lorient-agglo.fr)

## LE BRETON AU JOUR LE JOUR

### Glossaire : Geriaoueg

- Architecture : *Arkitektouriezh*
- Axe : *Ahel*
- Bureaux : *Burevioù*
- Carrefour : *Kroashent*
- Centre-Ville : *Kreiz-kêr*
- Circulation : *Tremenerezh*
- Commerces : *Stalioù(-kenwerzh)*
- Dynamisme : *Oberiantiz, begon*
- Éclairage : *Goulaouiñ*
- Ensoleillement : *Heoliadur*
- Espace (de vie) : *Lec'h (buhez)*
- Espaces verts : *Tachadoù glas*
- Extension : *Astenn*
- Habitations : *Lojerisoù*
- Hôtel : *Letioù*
- Immeubles : *Kendioù*
- Liaisons douces : *Hentoù hag a ziwall an natur*
- Parvis : *Leurgêr*
- Métamorphose : *Treuzfurmadur*
- Mixité : *Kemmesk*
- Modernité : *Modernelezh*
- Piétons : *Tud àr droed*
- Quartier : *Karter*
- Renouveau : *Nevezadur*
- Restaurant : *Preti*
- Rez-de-chaussée : *Rez-an-douar*
- Transport : *Treuzdougen*
- Vélos : *Beloioù*
- Voies ferrées : *Hentoù-houarn*
- Ville : *Kêr*
- Voyage : *Beaj*